

# MAGNIFICAT ! JOA D'AN DUD VAD !

Komzou : Job an Irien

Muzik : Mikael Skouarneg

*Goazed*

1. Meu - leu - di d'an Ao - trou Dou - e Gand le - ve - nez 'trid va e - ne!  
 2. Bur - zu - dou braz 'neus grêt 'vi - dom Dou - e San - tel dre e c'hal - loud.  
 3. Dre nerz e zorn an - dud lor - huz Zo i - zel - lêt be - teg dou - ar;  
 4. Di - wall a ra bem - dez e bobl E peb am - zer dre ga - ran - tez;

*An oll*

1. Gand ka - ran - tez e - neus sel - let Ouz i - zel - ded eur plac'h a feiz  
 2. E ga - ran - tez a dreuz ar béd En em zis - pak e - vi - dom toud  
 3. Ar re vi - an a ouel e kuz A dañv eur joa be - préd leun - barr;  
 4. E bro - me - saou 'zo 'vid an oll E - vid péb dén e va - de - lez;

*Merhed*

1. Ha da vi - ken po - blou ar béd A ven - ni - go eur pla - hig kêz.  
 2. Hag a ba - do dreist ar ste - red E ka - lo - nou an dud a beoc'h.  
 3. Ar re 've - ve din - dan an naon Bi - ken bre - mañ n'o de - zo aon.  
 4. Da vir - vi - ken meu - lom an Tad Ar Mab hag ar Spe - red San - tel.

Ma - gni - fi - cat! Joa d'an dud vad! Kan - (n)om, kan - (n)om Dou - e on Tad.

1. Meuleudi d'an Aotrou Doue  
 Gand levezet 'trid va ene !  
 Gand karantez e-neus sellet  
 Ouz izelded eur plac'h a feiz  
 Ha da viken poblou ar béd  
 A vennigo eur plahig kêz.

**Diskan : Magnificat ! Joa d'an dud vad !  
 Kanom, kanom Doue on Tad.**

2. Burzudou braz 'neus grêt 'vidom  
 Doue Santel dre e c'halloud.  
 E garantez a dreuz ar béd  
 En em zispak evidom toud  
 Hag a bado dreist ar stered  
 E kalonou an dud a beoc'h.

3. Dre nerz e zorn an dud lorhuz  
 Zo izellêt beteg douar ;  
 Ar re vian a ouel e kuz  
 A dañv eur joa bepred leun-barr ;  
 Ar re 'veve dindan an naon  
 Biken bremañ n'o dezo aon.

4. Diwall a ra bemdez e bobl  
 E peb amzer dre garantez ;  
 E bromesaou 'zo 'vid an oll  
 Evid péb dén e vadelez ;  
 Da virviken meulom an Tad  
 Ar Mab hag ar Spered Santel.

*Magnificat! Joie aux hommes de bonne volonté!*

1. Louange au Seigneur Dieu  
 Avec joie, vibre mon âme !  
 Avec amour, Il a regardé l'humilité  
 D'une femme de foi  
 Et pour toujours les peuples du monde  
 Béniront une femme toute simple.

R : *Magnificat ! Joie aux hommes de bonne volonté !  
 Chantons, chantons Dieu notre Père.*

2. Grandes merveilles a fait pour nous  
 Dieu Saint, par sa puissance.  
 Son amour par toute la terre  
 Se dévoile pour nous tous  
 Et durera par-delà les étoiles  
 Aux coeurs des hommes de paix.

3. Par la force de son bras les orgueilleux  
 Sont abaissés jusqu'à terre ;  
 Les petits qui pleurent en secret  
 Goûtent une joie toujours débordante ;  
 Ceux qui vivaient sous la faim  
 Jamais plus, désormais, n'auront à craindre.

4. Il protège chaque jour son peuple  
 En tout temps, par amour ;  
 Ses promesses sont pour tous  
 Pour tout homme, sa bonté ;  
 À jamais, louons le Père  
 Le Fils et l'Esprit-Saint.